

# Ar C'hevell : un doare dibar da vakañsiñ

E 2010 eo bet lañset gant kambrenwerzh ar rannvro hag an Arist (Agence régionale d'information stratégique et technologique) ar raktres IDDIL (Innovation & design durables dans l'industrie et les loisirs), gant ar pal lakaat da labourat asambles tachennoù-kampiñ, embregerezhioù ha dizagnerien ar vro. Ret e oa kavout ur spered nevez d'ar c'hampiñ e Breizh, gouest da zesañ an douristed da zont er vro kentoc'h evit mont da lec'h all er C'hwec'hkogn e-pad o vakañsoù.

Ur studiadenenn zo bet graet gant un ergonomour o lakaat war well doareoù an dud da vakañsiñ en tachennoù-kampiñ, ar pezh a gavent poellek hag ar pezh ne oa ket, hag evezhiadennoù a denne d'ar vro e-unan. Ur bern perzhioù mat evel-just o reiñ da c'houzout perak e teu alies an douristed e Breizh, met ivez traoù fall hag a laka anezho da vont kuit abretoc'h. Eo ! N'eo ket ur vojenn nemetken, siwazh... Padelezh ar vakañsoù er vro a c'hell bezañ berraet abalamour d'an amzer !

## Ur meizad a-vremañ gant ur spered hengounel

O kemer e kont an titouroù-mañ eo bet ijinet ul lojeiz war-neuñv gant an dizagner Owen Poho evit tachenn-kampiñ Ty-Nadan e Lokunole, ar C'HEVELL an hini eo. Dont a ra stumm ar C'hevell eus ar « panerou hir » savet gwechall gant koad kistin, hag a vez implijet gant ar besketerien legestr. Ar stumm-se a servij da wareziñ al lojeiz eus ar glav hag an avel. Itribilhet eo ur pezh danvez-lien dindan an eskern-goad ha posupl eo lakaat anezhi da ruilhañ evit goleiñ pe get al leurenn dia-vaez. Al lojeiz zo mat da zegemer betek 5 annezad evit ur gorread a 15 metrad karrez.

Ar c'hempenn-diabarzh a zo levezonet gant an tiez hengounel (penaos lakaat kalz a dud e nebeud a blas). En diabarzh e vez kavet ur gwele-kloz evit an dud deuet, ha daou wele-estaj evit ar vugale. Ur bank a zeu da vezañ ur gwele all evit un trede bugel e ken kaz. Ur sal-dour bihan gant privezioù hag ur walc'herez a vez kavet ivez. Evit tapout



**KEVELL**  
Design Owen Poho / Ty-Nadan  
Marque & Modèle Déposé

Arist2012

ur strinkadenn eo kinniget d'an dud mont da privezioù ar c'hampiñ.

Ul leurenn-goad a 17 metrad karrez a zo staliet dirak al lojeiz-mañ. Warni ur meubl-kegin war ruilh gant ur yenerez, un dar hag ur blakenn-gaz evit fardañ boued. Kemeret eo bet e kont gant an dizagner ar meuzioù ispisial a vez graet e-pad ar vakañsoù. Posupl eo rostañ pesked, pe silzig, hep ma vefe tamm c'hwezh ebet e-barzh al lojeiz, ha gwarezet eus ar glav ouzhpenn ! Nag ur sell brav eus ar stêr o tebriñ, me lârd deoc'h...

## Ur c'hentpatrom e pleustr dija

O paouez bezañ labeliset eo ar C'hevell gant Arselerien an dizagn (l'Observateur du design), ha diskouezet e vo er Cité de la science e Pariz e-pad ar

goañv o tont. Kinniget e vez ar C'hevell kentañ da feurmiñ abaoe an hañv war dachenn-kampiñ Ty-Nadan. Gortoz a reer ar studiadenenn-implij a zo bet roet d'ar feurmerien gentañ evit kaout o evezhiadennoù war ar meizad nevez-mañ. Diwar an evezhiadennoù-se e vo lañset ar stumm Kevell 2.0, un tamm brasoc'h anezhañ. Krouet eo bet an embregerezh Aquashell evit produiñ ha gwerzhañ anezho, kostez Minieg-Morvan. Raktresoù lojeiz nevez dizagnet gant Owen Poho a vo kavet abenn nebeut.

**Jean-Claude Le Gouaille**

Titouroù klok war :  
[www.bretagne.cci.fr/1-23510-Iddil.php](http://www.bretagne.cci.fr/1-23510-Iddil.php)  
<http://aquashell.fr/>  
<http://www.owenpoho.com/>